

(f. 155)

An den iaouank.

Me zo eun den iaouank gimidiq a Leon
 eun den divertissant, ia, ge a galon.
 hag a moa chonj da zansal
 Pa deuche an an ebatal
 D'ar sul d'ar pardonniou
 Da vond d'ar c'hoariou.

Mez setu troet ar Rod
 hag ed eunal em plass
 Poent e din chench a grog
 a pignad eur Roc'h vras
 Penos ober ar voien
 Da sevel eur greien
 Pa na meus den dam sikour
 me a c'houlen sikour
 Digant va gvir amour.

Skuilla, skuilla daëlou
 a skuilla evel rivierou
 Balamour da Jannton
 Glahar zo em c'halon.

Etre Kastel a Lesneven
 E c'hazezis var eun dunienn
 Var eun dunienn he hassezis
 raz va c'halonik e wellis.
 Gant keus d'am amzer tremenet
 evid goëla ne zistro ket.

}

Moris Follegour 18 mars 1851.